

# BOKET AR YAOUANKIS

RIMET AR BLAVEZ 1894

## 1<sup>e</sup> Couplet

Eur zulven deus a mintin, oan o len va leoriou  
Me glev ar lapousset, o cana er bodou  
A dre brenestou ma hamb, remerquen ar hlizen  
A heol brillant ar mintin, o tol e sclerijen.

## 2<sup>e</sup> Couplet

Tridal a ra ya halon, o clevet a lapousset  
Dre o an meuleudus, ac o moues allaouret  
Pere a lavar dinme, fasil mad dreo moues  
Poënt eo dide den yaouanc, dont dà choas eur vestres.

## 3<sup>e</sup> Couplet

Meus quet gret reflexion, vit clevet quement se  
Memes tra on nem laquet, da ober eur bale  
Evit quemer an er fresh, deus dousder ar mintin  
A meus laquet em speret, da vonet em jardin.

## 4<sup>e</sup> Couplet

Da gontempli ma fleurio, e mesk a louzou fin  
Dre o deillou arroset, gant glisen ar mintin  
A dre mo haven quer gai, a meus bet despunet  
Unan demeus o bep sort, da formi eur boket.

## 5<sup>e</sup> Couplet

Pehini ameus plaset, van eur prenest em zi  
Refreski ra ma halon, demeus e gontempli  
Pa oan deus e admirio, a meus bet remerquet  
Va fidella camarad, o tonet dam guelet.

## 6<sup>e</sup> Couplet

Evit donet d'am pedi, da vont sembles gantan  
Da bardona d'eur chapel, a so er baros man  
A goude fin an offic, a meus bet remerquet  
Eno var ar blassen, et kichen ar veret.

## 7<sup>e</sup> Couplet

Ar gaëra demeus ar fleur, a so bet var ar bed  
Me garfet e fossedi, da lacat em boked  
Kaëroh en evit a roz, ac an oll fleurennou  
Deus a guement a heller, guelet ar jardinou.

## 8<sup>e</sup> Couplet

Na neus na baum nac esans, capabl da dol eur houes  
Evelt da fleuren gaër se ma ne de aloës  
Mes defians vras a meus, pa velan e deillou  
Gant an aoun matrese, ve poëson e griou.

## 9<sup>e</sup> Couplet

Pep deillen anesi, a so evelt pentel  
Gant ar haera penturiou, a gaver var ar bed  
An aour ac or perles, ar haera ru a guen  
Memes ar mein presius, so netra ne hichen.

## 10<sup>e</sup> Couplet

Hounes a so caero, evit ne deo a loar  
Brillantoh evit a eol, dre e domder pa bär  
Ma bues en antier, ac an oll baperiou  
Zo netra evit design, rouanes ar fleuriou.

## 11<sup>e</sup> Couplet

Desir a meus d'onnous deoh, petra eo ar fleuren  
Eur plah yaouanc coant meurbet, vargonic an dachen  
Gant eur visach laouen, ac eur zéllou contant  
Caeroh, ei vit an astrou, demeus ar firmanant.

## 12<sup>e</sup> Couplet

Gant eur zellic a gorn, neur drei va daou lagad  
Eneur douch demeus e vrech, me lar dam hamarad  
Sel ase camard, eur gaer a plac'h yaouanc  
Houes a fat va mignon, a blich dan santimant.

## 13<sup>e</sup> Couplet

Mar mise hardiegues, deus ma intention  
A oam e de saludi, contant bras ma halon  
Me garfe cavet an tu, da glevet an doare  
Pe sort renq a zelh ar plah ac a be sort ligne.

## 14<sup>e</sup> Couplet

Kerquént a oan respontet, gant eun den venerab  
Oa eur plah honest a fur, eur famill respectab  
E homsou e demarchou, a blich dan oll dud fur  
Eur galon an tenera, eur plah a blujadur.

## 15<sup>e</sup> Couplet

Eurus ezon va den mad, da laret deo mersi  
Da vea roet dinme, an de paign anesi  
Gant fians eno comsou, a meus cales a joa  
Me se da lavaret deoch, kenavo ar henta.

## 16<sup>e</sup> Couplet

Ben eur pennad goudese, on daou neur bournmeni  
Gant cals a civilite, me ya da zaludi  
Dont a rad da houl enor, deus o compagnunes  
Mar de opolonte vad, da barlant asambles.

## 17<sup>e</sup> Couplet

Deus enim atreteni, gant cals a blujadur  
Dio heur or beus tremenet, coms deus on avautur  
Neuse hen an disparti, teump denem zaludi,  
Gant an esperans vad, denem zalempradi.

## 18<sup>e</sup> Couplet

Emen brometet or beus, queit a vemp e bue  
Da gaouet cals a respet, an eil vit egile  
Dont denem zalempradi, bepret en honestis  
A da basseal gant joa, deou or yaouankis.

## 19<sup>e</sup> Couplet

Neuse e vamp bet on daou, epad daou vla anter  
O roula or yaouankis, gant furner a dousder  
E pep leoh pa nem gavemp, zantemp ber an amser  
Pa meus bet fidelite, a carante dener.

## 20<sup>e</sup> Couplet

Deut mare ar parnoniou, me lar dar fumelen  
Dar bemzec deus a vis eost, dont da pardon Cleden  
Neuse a respontas din, na vise quet manquet  
A certain a viriones, e devoa din laret.

21<sup>e</sup> Couplet

Don deves assinet, me a ya dar pardon  
Trionfant ma speret, a joaus ma halon  
Pa oan erru eno, a meus e remerquet  
A oa en compagnunes, e hamaradeset.

22<sup>e</sup> Couplet

Kaeroh vit an eol brillant, pa losquet sclerijen  
Ma remerquas ma mestres, bars e porchet Cleden  
Kaeroh vit eur berlezen, ac ar fleur da mis mai  
Me remerquas ma mestres, kichen an nor gostai.

23<sup>e</sup> Couplet

Gant eur liou quer tener, eur horf quer delicat  
Eur zellou quer joaus, glas ye e daou lagat  
Hei ar vrava plah yaouanc, a guement so er bed  
Contantamant ma halon, joaustet va spered.

24<sup>e</sup> Couplet

Na neus den evit compren, pegueument e haran  
Goned a deus va halon, pa nem gonsideran  
E ne hompagnunes, ma va oll gontantamant  
Ac e foltret dirazon, a so ato presant.

25<sup>e</sup> Couplet

Goude ar gousperou, on daou omp nem gavet  
Ker contant a daou El, em andret prometet  
Pa oamp enim remerquet, or boa quement a joa  
An dour enon daou lagat casimant vel gouela.

26<sup>e</sup> Couplet

E bars en andret ze, sambles gant ma mestres  
A ma passet eno, tout va abardeyes  
Carout a ran mignonet, rei delhu da gomprem  
An daelou or boa scuillet, mesch ar homsou laouen.

27<sup>e</sup> Couplet

Enor or beus prometet, gant joa mesk on daelo  
Eur guir garante barfet, da betec ar maro  
Deus a hane dan illis, dirac Doue omp et  
Doffri or promessayou, dar Verhes beniguet.

28<sup>e</sup> Couplet

Neuse me e honduas, da betec ty e zad  
A glahar enor halon, o tont denem guitad  
O tont a hane dar guer, occupet ma speret  
O sonjal ne freposiou, na zanten quet kerset.

29<sup>e</sup> Couplet

Mes tostad a ra an heur, ma vemp dispartiet  
Ben eur pennad goudese, a recevas billet  
Lennet a meus varnesan, comzou meurbled houero  
Ret a va dit partial, do servich'an drapo.

30<sup>e</sup> Couplet

Ne quet o hont da zoudard, ema va nehamant  
O tilezei va mestres, ema va oll dormant  
Mes quen evit partial, on et betec e zi  
Dre gomsou an tenera ei deut dan honsoli.

31<sup>e</sup> Couplet

A dre liserou charmant, a receven alies  
Am boa consolation, eus a beurs ma mestres  
Neuse nem laquen do len, pa mise liberte  
Berroh caven an amser, o tremen ma honje.

32<sup>e</sup> Couplet

Eun tam roc'h ma honje, a meus bet recevet  
An ord a beurs ar cheffou, da vea disarmet  
Neuse gant empressamant, me scrivas eur liser  
Evit annons dam mestres, a oan erru dar guer.

33<sup>e</sup> Couplet

Ben pemsec de just goude, a oan e bars e dor  
Da eiz heur demeus a nos, e houennen digor  
Birvi a ra ma goad, neur antren bars en ti  
A kerkent cos a yaouanc, int deut dam ambrassi.

34<sup>e</sup> Couplet

Ma hunan pareillament, a meus laret deso  
Joa a meus eus o kuelet, mar em harit ato  
Va speret betec o ty, alies a so bet  
Abaou'ar vech divesa, a meus me o quitet.

35<sup>e</sup> Couplet

Ni so ives contant bras, ec'h n'em gavet er guer  
A herves an aparans, peus quet bet a viser  
Credit mad en assurans, qeit og bet en arme  
Na neus gret nemet creski, vidoh or harante.

36<sup>e</sup> Couplet

Neuse a meus esperans, cavout pero en temsor  
Pehini o peus savet, a maguet gaut enor  
A houi ma mestres fidel, gredan parfetamant  
Da laret emoh bepred, er memes santimant.

37<sup>e</sup> Couplet

Ma speret a va memor, oa ganeoh en arme  
Deus secrejou ma halon, houi bossed, on alhoue  
Houi an hini a garan, ac a garin bepred  
Vit gant ma bolonte vad, ne vemp quet separed.

38<sup>e</sup> Couplet

Mar emon do santimant, velt ezoh dam hani  
Goulenit demeus o tud, conje da zimesi  
Me meus annoncet dam re, pa oan erru aman  
A gant o bolonte vad, meus conje pa garan.

39<sup>e</sup> Couplet

Vit deus a beurs ma herent, no quet ampechamant  
Panonsin de or helou, a vont meurbled contant  
Kar na neus den er bed man, o ve do faltasi  
Houi a so do santimant, kercouls a dam hani.

40<sup>e</sup> Couplet

Ben eun neubeut devosiou, me nem gao ardare  
Evit clevet ar respont, a pobet digante  
A pa vo do bolonte, ni ayeio dan illis  
Evit commans echui, boquet ar yaouankis.

41<sup>e</sup> Couplet

Gant consantamant on tud, demeus on daou goste  
A gant o bolonte vad, an eil ac egule  
Ezomp bet dimeset, ac eureujet on daou  
Gras deomp ni da nem garet, eveilt guir briejaou

42<sup>e</sup> Couplet

Cetu echu ar boquet, demeus ar yaouankis  
Laquet or beus den erren, ruban an honestis  
Bremain pa seo echuet, zerred a paquet cloz  
Me a lak bars em hichem, em guele deus a noz.

43<sup>e</sup> Couplet

Gant gras Doue ac or poan, e teufomp da veva  
A houi yaouankis fidel, tachet do imita  
Deut denem hentchi bepred, gant eur guir honestis  
A houi o po plujadur, tremen o yaouankis.

44<sup>e</sup> Couplet

Diou rosen deus ma boquet, so gouenvet a maro  
Da renes a meus scuillet, meur a verad daelo  
Unan ane so chomet, ebars e Bannalec  
Ac an hani al a zo, ebars en Collorec.

45<sup>e</sup> Couplet

Ar peur rest anesan, a so guenen bepred  
Conservet epars em zi, gant cales a resped  
Gout a ouzon a dro zur, eo an Autrou Doue  
Mest da guemer a da rei, herves e volonte.

46<sup>e</sup> Couplet

A houi merhet yaouanc, a galon me o ped  
Na zeut quet da re flout, e preposiou goazed  
A mar zeufent da goms deoh, enep an honestis  
Lavarit de ep damant, mont buan var o his.

# FRAGILITE AN DUD YAOUANC

## Var eun ton rigolo

Ni boa eur hoguic yaouanc oa dunam guenemp-ni  
Oo commanset do gana, mes brema na ra mui  
Eun noves goude e goan, o tont eur zonj ne ben  
Me a renk mont en nos man, var digare pourmen.

Me renk ober eur bale, eun droyat var ar mes  
Da glask e merh Perina, digant a intanves  
Pe guir on hanvet coguik, gant oll dud ar vroma  
Me garfe caout eur boles, vit nem zivertissa.

Pa meus tapet an ano, a goguic vit partaj  
Vo ret din caouet parrez, da gomans ma menaj  
Perin merh an intanves, hounes a so dam grad  
Kanneres a danserres, brillant e daou lagad.

Bonsoir dehu intanves, setu me deut expres  
Da glosk o merh Perina, da hantur tiegues  
Rac qeit a ma vemp yaouanc, or bo contantamant  
A plujadur a sambles, ep chagrin na tourmant.

Ma merh me so abredic eur blaves hoas  
Mar de contant ar buguel, me na ranquet a gaz  
Kousquet eo ene guele, er pen dan traon a ti  
Monet a ran de havet, da houlent diganti.

Arsa ma merh emezi, na din me levered  
A houi so contant paouric, da gavet eur pried  
Berroh cafet an amser, breman epad an anv  
A toma doh o quele, goude pa zeui ar goanv.

O ya va mam emezi, certain me so contant  
Demeus a greis ma halon, da gaout eur pot yaouanc  
Mar dei caner a dansser, ac eur pot delicad  
Neuse a meus esperans, d'ober tiegues mad.

Neuse ar pot yaouanc man, a so jaoüs a guie  
Ac a sistroas da gaer, hed an hend neur gane  
Penos eta yan goguic, te so bet o vale  
Eun tam mout diversat, o hanons domp an de.

Neuse sistroas ouzin, gant eun air da hoarzin  
Mar de guir on me coguic, houi so eur louar fin  
Houi pefe eur vadeles da vont breman ractal  
Da anons ma dimesi, betec ar presbital.

Ar hoars var ma musellou, pa non quet vit miret  
Ya va mignon emesan, me rei se na requet  
Monet a ran evidoh, betec ar presbital  
Rac merh an intanves, evidoh ne quet fal.

Bonjour doh autrou person, me a so deut gant pres  
Da hout a houi zimefe, eur hoc ac eur boles  
Pere o deus desir bras, da vea unisset  
Eun tamic a so deja, o deus enim choaset.

Neuse a respontas din, ive neur vous hoarzin  
Deus aman ebars er zal, kemer eur bane guin  
Eroet ezout bepred, eun tamic de quevyer  
A teus clevet jamais, ve dimeset ar yer.

Excusit autrou person, mar meus drouc parlantet  
Malheur eo dandud yaouanc, pere so leshanvet  
A re a barlantan doh, a so daou zen yaouanc  
A zezir bet unisset, velt diou galon gontant.

A re a barlantan doh, so mal a fumelen  
A zevir bea stagnet, gant ar memes chaden  
Unan aue triveh vla, an hani all pemzec  
Zo pel so bras en hirvoud, hortos be dimeset.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dont dan illis  
A me o interrojo, var dern a hatekis  
Pa orgoulet digante, a na ouient netra  
Demeus ar sacramanchou, a re brinsipalla.

Filet dar guer bugale, evit eur bloa pe daou  
Da hortos ma pot desquet, dern arn sacramanchou  
Neuse zavas e siou scoa, me a gret a zonje  
Eun drues eo emesan, dimesi bugale.

Veuse a zeuont dar guer, o daou eneur ouela  
Ret a vo demp emeso, donet da studia  
Ret a vo demp studia, cols an de ac en nos  
Mar ouefomp quet re neve, ni zescoa re gos.

Tri pe bevar mis goude, a ya an intanves  
Da gaout an autrou person, da lard dan tol eves  
Rac va merh so languissant, eun tamic so deja  
Seul vui avans e hlenvet, ya bepred var yella.

Setu an autrou person, desi neus lavaret  
Lavarit deso dont hoas, ac a vont dimeset  
Houi a fad daou zen yaouanc, a lavar ar person  
A oar nem gonvertissa, ep mont dar mission

Ar memes tra ezint bet, dimed ac eureujet  
Graz da vea eürus, keit a vont var er bed  
Bonheur a zeziromp de, keit a von er bed ma  
A goude pa vont maro, er gloar de jouissa.

FIN

CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC Yves

# CHANSON NEVEZ

## BOKET AN EURET

### 1<sup>er</sup> Couplet

Dont a ran da houlen iseus diganeh compagnones  
Evit ma canimp eur boket ma vemp oll assambles  
Mar plich ganeh dont dam selaou en enor dan daou den yoanc  
A so bed eureujet hirie deus toal ar sacramant.

### 2<sup>e</sup> Couplet

Besa so eïste tremenet a boe ma voan avertisset  
Na da zont betec ama evit asista an euret  
Pa voa naveur hanter zonet hac ar vreg yoanc guisket  
Evit mont betec an ilis evit bes eureujet.

### 3<sup>e</sup> Couplet

Ar paot a enor hac ar plah a enor so en creis an ti  
Pa deus groet o homplimant so prest de hondui  
Mes honnan so eur plah fur eur plah eleuvet mad  
A deus astennet e fajou evit mont betec e zad.

### 4<sup>e</sup> Couplet

Rei a ra deson eur briata deus a greis e halon  
Pa deus accordet desi e venediction  
Disrie a ra deus e mam pehini neus e ganet  
A so bed en risk e bues deus e lacad er bed.

### 5<sup>e</sup> Couplet

Rei a ra desi eur briata an dour ne daoulagat  
Petric dall diman skuil daerrou pa renkan ho kuitad  
Quar me so choajet gant Doue vit chanch posision  
Ho tond d'ho cuitad ma zud kes ai glaharet ma halon.

### 6<sup>e</sup> Couplet

Dont a ran da laret adieu da di ma mam a ma zad  
Leh mar hon bed maguet sansourei hac ive eleuvet mad  
Leset gane ma liberte dont dan ebad a dan dans  
Mes breman renkan dilesel ma ol acustumans.

### 7<sup>e</sup> Couplet

Chom a riu gant ma labour a lesel an dançou ze  
Me bedo an dud da vont brema da di Doue  
Ken evit achui ar zermon deus ar fidelite  
A so entre an diou durzunel ar rest deus ho bues.

### 8<sup>e</sup> Couplet

No pa hai bars er quer ma hai roet ar boket  
Da verh hena deus an timan so hirie eureujet  
Ar verh hena deus an timan so eureujet hirie  
A neus quet ur plah er baros unan ken fur a hi.

### 9<sup>e</sup> Couplet

Pebeus deves kaer evidoh hirrie eta greg yoanc  
Partout dre leh ma tremefet ver deh obeissant  
Deus ar parkou hac ar prajou ve guelet ar zeblant  
Oll a guitafai ho labour vit mont d'ho quelet greg yoanc.

### 10<sup>e</sup> Couplet

Neuzai teuyo ar varhadourien a gantai peb a baner  
En neur dorhai ho daoulagat evit ma velfont scler  
Evit guelet an diou famil so assemblies unisset  
Evit ober anoudegues deus ar Marhad a peus gred.

### 11<sup>e</sup> Couplet

Na pa velon en pesort stad nem lag ar vreg yoanc  
Prest a zint dont de regali deus a sort e deveus hoant  
Profitet demeus a deman ho vreg yoanc eureujet  
Ar zunman so evidoh mes e ben all ne vo ket.

### 12<sup>e</sup> Couplet

Souhaite ran deh ar yehet eve prosperite  
Chanj a bonheur n'ho menaj hac union entrezai  
Mes mar deu ar maro da lakad fin d'ho bues  
Souhaitan dezai chanj padus en gloar an eternite.

GUILLEMIC.